

# AR VUHEZ KRISTEN



ADMINISTRATION

13, Place Alsace-Lorraine

LORIENT



C/C. POSTAL n<sup>o</sup> 209-84

SUR

NANTES

## Koumanantchou

An holl goumanantchou a gomans e miz Genver. — Skriva an hanoioù hag an adress fraez ha penn-da-benn ; ma n'eus bureo post ebet er gomun, lakat gant pehini e vez graet.

Koumanant ordinal : **6** l. ar bloaz.

Koumanant a enor : **10** l. ar bloaz, gant perz e 365 OFERENN (unan bemdez) a vez lavaret bep bloaz evit hor madoberourien.

N.-B. — Hol lennerien, m'o deus c'hoant, a c'hell dreizo o-unan rei frouez an oferennoù-se d'o zud varo.

## Adkoumanantchou

An neb a vez echu e goumanant, a vez kaset d'ezan dre ar post eur « MANDAT-CARTE », evit ma c'hello koumananti a-nevez. —

Ni a gont war bolontez vat hol lennerien evit paea raktal.

An neb n'en devo ket paet *TRI MIZ GOUDE*, ne resevo mui ar gelaouenn.

*TAOLIT EVEZ* : lavarit atao petra 'zigasit d'eomp : EUN ADKOUMANANT pe EUR C'HOUMANANT NEVEZ ; ma tigasit asamblez adkoumanantchou ha koumanantchou nevez, *DISPARTIA MAT ANEZO*. — Evit eun adkoumanant, rei d'eomp an adress eun *EVEL MA OA WAR AN NIVERENN DIWEZA...* ha ma'z eo ret, goulenn da-c'houde chanj anezi.

## Chanj adress

Evit chanj adress, digas d'eomp 4 real e timbrjou gant an adress evit ma oa war an niverenn diweza.

## Liziri ha skridou

An holl liziri a dle beza kaset da :

Administration de « Ar Vuhez Kristen »,  
13, place Alsace-Lorraine, Lorient (Morbihan)  
C.-C. 209-81, Nantes.

N. B. Ar gelaouenn-man a zo moulet ivez e galleg ; rak-se ar re o defe c'hoant da gaout an hini c'hallek e-lec'h an hin vrezonek, n'o defe nemet skriva d'eomp, hag e vefe kaset d'ezo *La Vie Chrétienne e-lec'h Ar Vuhez Kristen*.

## Mamm...



An den da eur e varo, a zeu atao sonj d'ezan eus e vamm. He gervel a ra zoken pa vez pell dioutan, zoken pa vez maro pell'zo.

Jezuz, d'ezan eur galon evel hon hini, a c'hoantaas kaout e vamm en e gichen da eur e varo.

C'hoant en doa lakat e zaoulagad e daoulagad e vamm evit lavaret d'ez, eur wech c'hoaz, pegement he c'harie.

C'hoant en doa unani e vamm gant e sakrifiz, ha deuet oa eviti an eur da gemeret he lodenn a boan evit kas da benn labour galet silvidigez ar bed.

Mari a asantas kemeret perz el labour-se. Ret oa d'ez beza dreist holl grouadurien ar bed, n'eo ket hepken dre ar grasou kaer a oa hec'h ene karget ganto, met ivez dre an trubuilhou a vije he c'halon gwasket ganto.

Piou a lavaro glac'har eur vamm pa wel he bugel war e dremenvan ?

Piou a lavaro glac'har ar wella eus ar mammoù o welet o vervel karantezusa mab he deus bet biskoaz eur vamm.

Pa welas e vamm ha Yann, e abostol muia karet, e-harz e groaz, Jezuz a lavaras da Vari : « Maouez, setu aman ho mab, » ha da Yann « Mab, setu aze da vamm ».

Aman koulz hag e pep lec'h komzou Jezuz a zeu raktal da veza gwir ; lakaat a reont kerkent e kalon ar Werc'hez eur garantez a vamm e kenver Yann, hag e kalon Yann karanterez eur Mab e kenver ar Werc'hez.

Met Sant Yann e harz ar Groaz a zalc'he plas pep hini ac'hanomp. N'eo ket d'ezan hepken, met d'eomp-ni holl e roas Jezuz Mari da vamm ; ha ni holl a zo bet roet gantan da vugale d'ar Werc'hez.

Marteze ez omp bugale digalon ha dianaoudek...

GLOVO



SORC'HENNOU YANN DIGREDENN

### An dud desket n'o deus ket a feiz

Gwelomp adarre ha gwir eo ar gonc'henn-man.

— C'houi a zo bet en train, Yann; ha gouzout a rit ervat, n'eus ket c'hoaz gwall bell, ne oa ket en hor bro a hent-houarn.

Watt ha Marc Seguin eo an daou zen desket o deus labourret ha kavet an doare da rei tro d'eomp da veachi ken buan.

Watt a oa eur c'hristen eus ar re wella. Araok mervel, d'an oad a 83 bloaz e kane « bennoz da Zoue evit an holl vadou en doa resevet digantan e-pad e vuhez. »

Marc Seguin a oa ken start all e feiz. Bemdez, goude koan, e taouline e-kreiz e vugale hag holl dud e di evit ober ar pedennoù diouz an noz.

Eun dervez eun Itron a doullas kaoz d'ezan diwar-benn sakramant ar binijenn. — « Ar govesion, eme an Itronig, a zo mat evit an dud dizesk..., met c'houi, Aotrou Seguin, c'houi... — Me, Itron, a vez o korez hag eürus kenan oun a gement-se », a respontas krak ha berr an Ao. Seguin, d'an Itronig difeiz, eun dintin goz bennak deoc'h c'houi, moarvat, Yann.

★ ★

Sonj ho peus, Yann, eus an amzer ma ne veze sklerijennet ho ti, pa zeue an noz, nemet gant eun tamm goulou lutig, flierius ha mogedus. Hirio c'houi a zo lore'h ennoe'h o kaout « elektrisite ».

Piou eo an dud desket o deus digaset d'eomp eur goulou ken kaer ? Setu o anoioù : Galvani, Volta, Ampère, Faraday.

Galvani a oa eus Trivet-Urz Sant Fransez.

Volta a yae bemdez d'an oferen.

Ampère, e-kreiz e labourioù a chome alies a-sav ha

sebezet holl a lavare d'e vignon Ozanam « O, na Doue 'zo bras, Ozanam, na Doue, zo bras ! »

Faraday ne grenas ket evit anzav, eun dervez, dirak an holl, e-kreiz Skol-Veur Londrez. « Me a gred start e Doue, ha douja a ran d'ezan gant karantez rak gwelet a ran ez eo hor Mestr, ken sklaer ha ma welan ez eo gwenn erc'h ar menez-tlou. »

Setu unan bennak kouezet klanv en ho ti. Buan e c'halvet ar medesin dre an « telefon ». Na pebez aesamant gellout kas kelou ken dillo ! Da biou e tleomp lavaret bennoz a gement all ? Da zaou zen desket a dra-sur, kristenien eus ar c'henta a daou, Oersted ha Morse.

Morse, er bloavez 1869, e voe graet e New-York gouelioù dispar en enor d'ezan. Da fin ar gouelioù e voe goulennet digantan kas eur pellgeal (dépêche) da holl gerioù an Amerik. Morse a asantas hag a gasas ar c'helou-man dre ar vro abez : « Gloar da Zoue e barr an neñvou ha peoc'h war an douar d'an dud a volentez vat ».

Setu aze eur guchennig tud desket hag o doa eun tamm relijion bennak... ha n'em eus ket o hanvet holl. William Thomson, a gavas an doare da bellgelaoui dre an dindan vor; Jouffroy d'Albans a zeuas a-benn da gas ar bagou en dro dre dan; Becquerel ha Branly, o deus roet d'eomp an T. S. F..., a oa ivez tud leun a feiz.

Eur wech all, Yann, e vezo fur deoc'h ober seiz tro d'ho kenou gant ho teod hir, araok distaga d'eomp marvailhoù eus ar seurt-se.

MABIG.

### VOTI ! VOTI ! !

An holl a vez klevet oc'h ober rebechoù d'ar c'houarnamant.

Ar c'houarnamant en tuman, ar c'houarnamant en tu all...

An dra-man a sell ouz ar c'houarnamant, ar c'houarnamant a zo penn-abeg d'an dra-se...

Met goude-holl, piou a ra ar c'houarnamant ? Piou ? Met an holl, pegwir an holl a c'hell voti...



## Roue ha gwir gristen

Bloaz a zo, hag eun tammig ouspenn, en deus Albert I, roue ar Belgig, kavet e varo o pourmen war veneziou an Arden.

Ar bed a-bez a reas kaonv d'ar roue kalonek, en doa, 20 vloaz arak saveteet e vro, dalc'het enni al lealded hag an urz vat dirak eun enebour disleal ha devergont.



D'eomp-ni kristenien eo bet kaletoc'h c'hoaz ar c'helouse, rak ar roue aet d'an anaon a oa bet kristen epad e vuhez n'eo ket hepken dre ano, met dre e gomzou hag e oberou. Bepred, e pep lec'h hag e pep tra e talc'has start da holl gredennou ha da holl c'hourc'hennou ar relijion.

Pa zeuas hon enebourien da gila er bloaz 1918, pa voe digelc'het e vro, e lavaras e yafe, en eur zigouezout e Liej,

war eün d'an iliz-veur : « Dre va c'harg a roue ez oun ar c'henta er vro, fellout a ra d'in beza ivez ar c'henta kristen. » Gwelet e veze daoulinet epad hir amzer dirak aoteriou an Doue a roas d'ezan a-nevez e bobl, e zouarou hag e gurunenn.

Epad e veaj er Bresil hag er C'hongo, bep sul e kleve an oferenn e iliz ar barrez ma veze enni; hep teurel evez hag an iliz-se a oa eun iliz-veur pe eur chapelig taouarc'h pe goat. E Kelaouennou Breuriez ar Feiz eo bet embannet poltred ar Roue Albert hag e bried, daoulinet o daou o heuilh an oferenn en unan eus ar-chapeligou-se.

E Siergnon, eur barrez vihan war maeziou ar Belgik, epad amzer Fask, e falvezas gantan ober e bask gant gwa- zed ar barrez. Evelto ez cas er gador-govez d'e dro, ganto e taoulinas en iliz ha d'o heul e tostaas ouz an daol santel. Gourdrouz a reas zoken ar c'hloc'her da veza dalc'het d'ezan ar plas a enor hag e lavaras « En dro genta e fell d'in keme- ret va zro evel an holl. »

Pa zimezas e vab hena gant ar brinsez Astrid, a oa c'hoaz d'ar mare-se e relijion ar Brotestanded, ne falvezas ket d'ezan e vije lid ebet en iliz protestant, evit senti penn- da-benn ouz al lezennou savet gant an Iliz evit reiza an di- meziou a vez graet etre eur c'hatolik hag eun all bennak eus eur relijion all. Ha gant levez e kasas kelou d'Hon Tad Santel ar Pab eus distro e verc'h-kaer d'ar gwir relijion gristen.

En em glevet a reas atao gant eskibien ha beleien ar Bel- jik, ha dreist-holl gant ar c'hardinal Mercier, Doue e bar- dono. Da interamant ar C'hardinal e voe gwelet o pedi war- lerc'h an arched gant e vab a zo hirio roue en e lec'h ha gant ar Marechal Foch.

E-tal e wele e veze atao leor « Imitation J. K. », ha bem- dez e lenne eur pennadig anezan.

Hep douetañs, goude beza renet eur vuhez ken kristen, daoust d'ezan da veza bet eur maro ken trumm, e c'hellomp kredi eo bet digemeret gant Doue en e varadoz.

PENN-KALET.



Lakaat eur gelaouenn gristen en ho ti a zo rei digor d'Hor Salver Jezuz-Kris e-unan.



## Ar mansoner hag ar beleg

En eur gear tost awalc'h da Baris, eur beleg a oa o tremen dre eur ru hag a en em gavas gant eur vandenn vicherourien a oa o labourat war eun ti nevez.

Ar vicherourien, pa vezont o-unan, a zo alies tud vat, met pa vezont meur a hini en er gichen, o deus aon an eil rak egile hag int gouest da lavaret da d'ober traou diskiant.

Eur mansoner, o welet ar beleg o vont, a lavaras a vouez uhel. « *Me a garfe beza e plas hennez. Netra d'ober e doug an deiz ha paet mat, bevet mat; brao eo d'ar re-se beza war an douar !* »

Ar beleg a glevas, hag evel n'en doa ket aon rak e skeud, e chomas a-zav hag e lavaras d'ar mansoner : « *Selaou, paotr. Me a baeo d'it, da zervez, ma teuez ganen da gement lec'h am eus da vont hirio.* » Al labourerien all a vouse'hoarze hag unan anezo a lavaras : « *Alo, mansoner, mar dout den, ez i gant ar beleg.* »

Ar mansoner, laket nec'het, poulzet gant e gamaraded, a heulias ar beleg.

« *Bez dinec'h, a lavaras heman; te a zo eun den mat. Gwelet a ri hirio re all hag a zo distroc'h o stad eget da' hini. Nag a dud reuzeudik a zo war an douar !* »

Hag ec'h en em gavjont en eun ti a oa ennan war e wele eun tad a familh taget gant ar c'hlenved peultrin, liou ar maro warnan. E c'hwreg ha pevar bugel, bihan c'hoaz, n'o doa den da c'hounit bara d'ezo. Ar vamm a voale'he d'ar re all, pa c'helle, hag a c'houneze evelse eur gwenneg bennak. Met breman e rank chom atao e kichen he gwaz a zo dare da vervel.

Ar beleg a govesaas an hini klanv, hag a gendalc'has gant e hent, ar mansoner gantan. « *Te a sonj d'it, eme ar beleg, n'em eus ken d'ober nemet dastum arc'hant. N'oun ket pinvidik, ha ma vijen, e kavjen tro da implija va arc'hant. Roet an eus eun aluzenn d'ar vaouez geaz-se. N'em eus ket getlet, avat, rei awalc'h.* »

Enaint en em gavet breman en eun ti all a zo ennan eur paotr klanv gant ar skarlatin.

« *Ar c'hlenved-se a zo spegus, eme ar mansoner.* »

— « *Ya, a respont ar beleg; rakse chom er maez.* »

Goude beza gwelet ar paotr klanv gant ar skarlatin, ar beleg a lavaras d'ar mansoner :

« *Tostaat a ra ouz dek eur. Deomp etrezeg an iliz. Eun eured am eus da venniga.* »

Goude an oferenn eured, ar beleg a gemeras buan eur banne kafe hag eur c'henaouad vara, hag araok mont kuit eus ar presbital, a lavaras d'e vatez : « *Hirio e vezimp daou da leina.* »

— « *Breman, mansoner, ez eomp d'eul labour all, d'ober katekiz d'ar vugale betek kreisteiz.* »

Ar mansoner a welas endro d'ar beleg eun tri-ugent paotrig bennak, hag epad eun eur e voe desket d'ezo o fedennou, o c'hatekiz, displeget d'ezo gwirioneziou ar relijion, graet d'ezo kana eur c'hantig

Da c'houde ar mansoner a leinas gant ar beleg en e brespital. Peadra a oa da zebri, met nann friko bras.

« *Greomp breman eun dro er jardin, eme ar beleg, ha bremaik ez aimp adarre da welet tud klanv, rak breman er goanv ez eus kalz klenvejou.* »

— « *Ha da c'houde, petra ho vezo d'ober ?* »

— « *Da beder eur, katekiz d'ar merc'hed bihan.* »

— « *Ha da c'houde ?* »

— « *E lavarin va brevier hag e preparin eur brezegenn betek koan a zo da zeiz eur. Ha goule koan em bezo gwazed ha paotred yaouank er patronaj betek dek eur.* »

— « *Ha bemdez evelse ?* »

— « *Awechou e vez nebeutoc'h a dud klanv.* »

— « *Evelato an holl veleien ne reont ket kement ha c'houi ?* »

— « *N'ouzoun ket. Ar re holl a anavezan o deus kalz re d'ober.* »

Ar mansoner n'oa ket eun den fall, eun tamm relijion en doa c'hoaz. Met adaleg an deiz-se e wellas kalz, ha ne glaskas mui ober goap ouz eur beleg.

## Evit beza salvet, eo ret anaout

MISTER AN ETERNITE

Diwar-benn an Ifern: petra o deus lavaret ar Baganed  
brudeta ? Petra lavar an Aviel ?

A-viskoaz, e pep amzer hag e peb bro, — a lavare an niverenn  
ziveza — eo bet kredet ez eus eun ifern hag eun ifern peur-  
badus. Arabat eta beza souezet ma prezeg an Iliz ar wirionez-se.

Setu aman eur pennad bennak eus skridoù ar baganed bruda-  
deta diwar-benn an Ifern.

★

Virjil a lavar kement man : « Eno, emezan, e weler Tézé,  
azezet hag azezet evit biken, war eur gador rust ha kalet, ha  
ne c'hello sevel biken diwarni. Sedet aeternumque sedebit.

— Eno, eman Tité, eur peziad den fallak; her gwelout a raer  
staget ouz eur roc'h, eur pezh spalouer o krignat hep ehan e  
eu, e gor hag e vouzellou, ha kerent m'int drebel, e kreskonh  
adarre hag evelse hep ehan hag hep fin. Immortale jecur ton-  
dens... et viscera.

Eno c'hoaz, a lavar Ovid, eur skrivagner bras all, e weler  
Sizif, eun ailhañ epad e vuhez, o klask sevel eur pezh roc'h eus  
traon eur menez betek an neac'h. Allas hep gwech ma vez savet  
tost da veg ar menez, hep gwech e tiriilh d'an traon. Hag ar  
paour-kez Sizif a zo krog atao en e labour, ha ne devio abenn  
anezan biskoaz.

★

Sklaer eo eta e krede ar baganed gwechall, ez eus evit ar re  
fall, poaniou da c'houzanv warlerc'h ar vuhez man, ha poaniou  
hag a bado da viken.

Setu c'hoaz ar pezh a lavare Platon, skrivagner pagan ive,  
met eur Mestr skolaer anavezetoc'h ha desketoc'h eget an holl  
skrivagnerien all :

— « An dorjetourien, emezan, ma ne jenchont buhez araok  
« mervel, a c'houzanvo poaniou garo epad an eternite. An  
« eneoù, karget a dorfejou bras er bed man, a vez taolet, war  
« lerc'h o maro, en eun istonk a vez graet ifern anezan. Setu  
« barnedigez an Doueou o chom en Nenn, an Doueou ho peus  
« disprijet epad ho puhez war an douar. »

Gwelit c'hoaz : e penn kenta an Iliz, Celse, skrivagner pagan,  
enebour bras d'ar gristenien, a lavare, o klask ober goab anezo :

— « Ar gristenien, emezan, a brezeg e vo digollet ar re vat  
« eus o foaniou warlerc'h ar maro, en Nenn, hag e c'houzanvo  
« ar re fall poaniou eternel en ifern. Ah a ! lavarit d'in eta... »

— 1101 —

« daoust hag eun nevezinti eo kement se ? a viskoaz ec'h anavez  
« an dud holl ar wirionez-se... »

★

An holl dud eta, gwechall, a grede start ez eus warlerc'h ar  
vuhez-man, poaniou kalet, o c'hortoz ar re o deus bevet fall war  
an douar. N'eo ket koulskoude eur wirionez plijadurus da  
glevet ! !.

Mar d'eo bet kredet a-viskoaz, daoust peger kalet eo, kement-  
se a ziskouez eo sklaer ar wirionez-se, ha ne dalv ket ar boan  
en em sevel enebti.

★

Hag an Aviel, petra lavar eus an Ifern ? Kalz skleroc'h eo  
c'hoaz e gomzou eget re skrivagnerien an amzer goz.

— Ma teu ho tourn d'ho gwall skoueria — da lavaret eo m'ho  
laka da goueza er pec'hed, — a lavare Jezuz o komz diwarbenn  
ar pec'hed a skouer-fall — trouc'hit ho tourn ! Rak gwelloc'h eo  
mont d'ar vuhez eternel gant eun dour hepken, eget beza  
taolet gant ho taou zourn en Ifern... el lec'h ma chomo dalc'h  
mat beo an tan... el lec'h ma ne varv morse an tan. »  
St Mark IX.

★

E kant lec'h all e lavar an Aviel ar memez tra skleroc'h  
sklera, betek ma en em gav gant ar gerioù man hag a lavaro  
Doue dez ar varn ziveza :

— « Kerzit, tud miliget, d'an tan eternel, a zo bet c'houeze  
« evit an Diaoul hag e genseurted. »

« Hag ar rese — ar re fall — a yelo d'ar boan eternel;  
« hag ar re vat a yelo d'ar vuhez eternel. »

Sklaer eo eta ar Wirionez man : Bez-ez eus eun Ifern !  
Ar baganed, ar gristenien, an Aviel, an Iliz, ar bed a-bez a  
gred kement-se.

En em sevel eneb d'ar wirionez-se a zo en em sevel eneb d'an  
dud holl : eur pennad ourgouilh !

Nac'h ar wirionez-se a zo nac'h an heol da greisteiz :  
dallentez a spered.

Met perak eun ifern ? Peger e pado ?

Peseurt poaniou a zo ennan ?

Diwezatac'h e welimp an dra-se.

Da c'hortoz, kanomp gant ar c'hantik.

Warlerc'h ar Varn ziveza :

Ar re vat yelo d'an Nenn; d'an Ifern ar re fall  
Bemdez, er wirionez man, e rafemo mat sonjal.

MELEGAN.

## Gwerz latin Itron Varia Lourd

### TROET E BREZONEG

*Ton : Pange solemnes*

*Rener an Iliz en deus d'eomp embannet  
Ez eo bet Mari diouz pep kailhar miret :  
Hag ar bed kristen a lid, gant levez,  
Glanded ar Werc'hez.*

*Mari he-unan, drant ha leun a zouster,  
En em ziskouezas d'eur verc'h lent ha dister,  
Hag a lavaras : « Me 'zo bet konsevet  
Pell diouz ar pec'hed ! »*

*O ker evurus kement darempredet  
Gant gwir Vamm Doue, Mamm Jezuz benniget !  
O reier santel a ro d'eomp hep paouez  
Dour puilh ar vuhez !*

*Eno niverus, hag eus an holl vroiou,  
Gant feiz ha fizians e tired an dudou :  
Eno e pedont ar Werc'hez galloudus  
D'o skora nerzus.*

*Ar Vamm druezus a sell ouz o daelou,  
Hag a skuilh warno eus he gwella grasou :  
D'ar gêr da c'houde an dud-man, dianken,  
A zistro laouen.*


*O Gwerc'hez dinamm ! ho pet truez ouzomp ;  
E-kreiz hor poaniou skoazellit ac'hanomp,  
Ha grit ma saourimp eürusted dudius  
Ar vuhez padus*

*Tad, Mab ha Spered, tri Ferson e Doue,  
Hag a vev ato par an eil d'egile,  
Ra viot meulet, hed an holl amzeriou,  
Gant an holl boblou !*

BASTIEN

## Bleizi hag oaned

Eman echu amzer ar Jubile. Mat eo d'eomp sonjal e mister ar C'halvar. Naontek kant vloaz a zo, war dorgenn ar Golgotha, Mab Doue en em c'hraet den en deus skuilhet e wad betek ar berad diweza. Perak ?



O pignat war menez Kalvar, H. S. en deus digoret hent ar Groaz. An hent-se a vez kaletoc'h d'an eil eget d'egile, met holl hon eus da dremen dreizan. « Dalc'hit sonj, eme Jezuz d'e Ebestel, ouz ar c'homzou-ma lavaran d'eoc'h : Ar mevel n'eman ket dreist e vestr. M'o deus gwallgaset ac'hanoun-me, e walgasin ac'hanoc'h-c'houi ivez.. O kas a

ran evel oaned etouez bleizi. Diouallit ouz an dud. O kervel a raint en o lez-varniou; o skourjeza a raint en o sinagogou; o kas a raint dirak o rouaned hag o frinsed abalamour d'in. »

Abaoue amzeriou kenta an Iliz eman ar gwad gwella o ruilh, gwad dinamm ar verzerien, skuilhet gant hini Hor Mestr, evit pec'hejou ar bed.

En deiz hirio, war zigarez m'en deus an den lakaet mui-oc'h a aezamant en e vuhez evit ar bevans, ar wiskamant hag al lojeiz, m'en deus fardet ostilhou ijinus evit e labour hag e blijadur, e sonjer eo « sivilizet » ar boblou. Fazia raer marteze : ar bed ne vezo « sivilizet » nemet pa vezo roet antreac'h d'ar wirionez war ar gaou, d'ar burete war an dizurz, d'ar garantez war ar gasoni, pa vezo stank ennan, evel ar stered lugernus en oabl, an eneo santel. Hag en hon amzer ez eus re a dud debret gant ar gasoni, re a galonou devet gant an derzienn fall, re a sperejou dallet gant ar gaou evit ma c'hellfer lavarout eman eün an traou.


Setu m'o kasan evel oaned e-touez bleizi...

Kristenien ar Meksig o deus gwelet ar bleizi-se o sailha warno. D'an deiz kenta a viz Eost 1926 e tirollas kounnar enebourien Doue hag an Iliz; betek 1929 ne oa nemet torfejou a-enep Doue, an Eskibien, ar veleien, an holl gatoliked. Diaes e ve kounta ar re o deus roet o buhez evit ar feiz. E miz C'houevreur 1928 e voe distrujet 200 beleg. E miz Meurs war lerc'h e oe ordrenet da 22 eskob mont en harlu; seiz anezo a jomas e Meksiko, ar gêr-benn, c'houec'h all en em guzas dre ar vro. — Goude eur pennad ehan, ar baotred digernez a zo aet adarre war o c'hement-all : ar gatoliked a zo dindan ar C'houarnamant a rank nac'h o feiz dindan boan da goll o flasou; al lizeri a vez digoret er post; ar c'hazeten-nou kristen ne vezont ket digemeret er vro; ar C'hloerdiou a zo serret ha perc'hennet gant ar C'houarnamant; ar veleien a rank beza ken rouez en eur rann-vro ma ne c'hell ket ar gristenien heuilh o relijion.

Kaera 'zo, pa vez goulennet digant ar vuntrerien ha gwir eo kement a leverer diwar ar brezel graet d'ar relijion, e respontont dalc'hmat : « Ne vez ket klasket trabaz ouz ar gatoliked; n'o deus d'en em glemm ouz gaou na droug ebet; iakaat senti ouz al lezenn a reomp, ha netra ken ! »

Ma n'eo ket ar seurt-se bleizi, n'ouzon ket da belec'h mont d'o c'hilask !

DEVY



### Ar Feiz, dudi d'hor c'halon

Daou pe dri bloaz 'zo, eur beleg protestant, a Vro-Saoz, eun den desket bras, an ao. William Fore Stead, a c'houlennas beza digemeret en Iliz katolik.

Kalz tud a oa o klask gouzout perak en doa dilezet e feiz koz evit dont e-touez ar gatoliked. Setu aman ar pez a respontas :

« Er relijion protestant, morse n' ez eus bet desket d'in na lida gouelioù ar Sent, nag o fedi, Ar Sent ne oant evidoun nemet tud varo, ken pell diouzin eget an holl anaon all.

« Pebez fazi a oa em spered !

« N'ouzon ket hag an holl gatoliked a gompren mat ar dra gaër-man : hon eus ni da vignonet sant Per, sant Paul, sant Fransez, santez Tereza ar Mabig Jezuz !

« Evidoun-me, ne varc'hatan mui evit goulenn digant ar Sent pedi evidoun. Ha ma 'z eo dinerz ha didalvez va fedennou, em eus d'am skoazella brasa mistri ar bedem zo bet biskouz, deuet da veza va mignonet. »

An ao. Stead a lavare ouspenn :

« Ar pez a blij c'hoaz d'am c'halon eo ar garantez, hevel ouz hini eur vamm, a ziskouez an Iliz e kemmer ar re baoura eus hor breudeur, ar re a zo aet d'ar bed all.

« En holl relijionou all, a zo kristen war o meno, e tilezer ar re varo, pa z' int bet douget d'ar vered, dre ma kreder, er relijionou-se, n'hellomp mui ober netra eyto.

« Ha koulskoude an darn vuia eus an dud, pa varvont, n'int ket prest c'hoaz da vont da gemer o lod eus eürusted ar baradoz : gortoz a rankont ha gouzout pouñiou evit en em

walc'hi diouz o fec'hejou. Hor pedemou eta a gouezo uarno, evel ar gliz, d'ar beure, war ar parkeier.


« Met an Iliz katolik, hag hi hepken, ne oar ket ankounac'haat he bugale, goude ma 'z int aet eus ar bed-man. Pedit a ra evito, ha goulenn a ra digant he zud fidel pedit evito.

« Kement-se a zo c'houek kenan d'am c'halon. »

Pa c'houlenner ouzoc'hi, kristenien, perak e kredit emaoe'c'h er gwir Iliz, c'houi a oar respont, emichañs, eo abalamour n'ez eus nemet ar relijion gatolik hag a zo bet savec gant Mab Doue, ha n'eus nemeti hag a zo, evel ma felle d'ezan, « unan, santel, katolik, abostolik. »

Lavarout a hellit ouspenn : abalamour n'eus nemeti hag a zo gouest da blijout e gwirionez da galon an den kerkoulz ha d'e spered.

Penaos ? E meur a zoare. Hag etouez an dud'usa : o rei d'eomp ar Sent da vignoned, o pedit evit an Anaon. KEON.



### Euz pôtrig divorfil. . .

Ne gavit ket eo brao beza tad pe vamm da eur pôtrig evel Albert ?... Petra ? Ne anavezit ket Albert ?... Albert a zo unan eus ar c'hrennarded-se a gaver stank breman er staliou-labour... etouez ar vicherourien vras.

Kurust oa bet, ha darempredet en doa pôtrid ar J. O. C. An holl er stal a ouie Albert eur c'hristen mat... Eun dervez, micherourien, mall ganto saotri eun ene glan, eur galon yac'h, a stagas d'ober

goap outan...

« Tamm kurust dilostet, eme unan, digas ar morzol bras d'in » — ... Albert ne ra van ebet.

« Louunker dour-benniget, ar morzol a c'houlennan ! » Albert ne ra van ebet.

« Moumounn ar veleien, klevet a rez ? »

Albert ne ra van ebet... kaer a zo lavaret.

Kounnaret holl, eur micherour a grog e brec'h ar pôtrig : « Klevet a rez, penn-santig, ar morzol am eus goulennet. Perak ne zentez ket, pa vezez galvet ? »

— « N'em eus ket klevet va ano, aotrou, eme Albert. Va ano d'in me eo Albert. Da zeiz va badiziant eo bet roet d'in. E garet a ran evel ma karan va Doue. Pa vezin galvet dre an ano kristenman e respountin... hag e sentin atao ! »...

Den ne lavaras grik, meur a hini a ruzias gant ar vez. Met diwar neuze an holl a gomzas dereat ouz Albert, ar c'hristen dispount...

GWENOLE



### Eun deiz pardon e bro an Indianed

Gouestadig, gouestadig ez ae ar vag war zour didrous al lenn. An tad hag e vab yaouank a oa ouz he foulza gant eur pennad baz hir hag a sankent en douar. Me a oa en em ginniget d'o sikour, met dre aman, emezo, an dud a gavfe abeg e kement-se, n'eo ket dereat evit eur beleg ober labour ar besketerien.

An dra-man a oa d'ar sadorn, diouz an abardaez hag ez edon o vont da Astankotta evit ar pardon. Va zaou besketer o doa promet d'in e vijen rentet eno e diou eur horolaj, met d'an tiz ma kerzemp e oa sklaer e vije ret da vihana pemp eur horolaj. Ouspenn-se, goude eur pennadig amzer e savas « chikan » etrezo : ar paotr yaouank a felle d'ezan staga eun tamm truilhou e beg eur vaz bambou evit ober eur ouel, hag an tad a lavare ne dalveze ket ar boan, dre ma ne oa ket eur mouchad avel, ar pezh a oa gwir.

Ouz o c'hlevet o chikanat e oa skler e kave ar po-tr-yaouank, gant e roched nevez o ficha war e lostenn wenn (evelse eman ar c'hiz dre aman) edo e dad enn den re a c'hiz koz, gant e dammig dilhad endro d'e groazlez.

Ar pôtr yaouank ne vanke ket eun digarez da ziskouez an nao pe zek ger saos a ouie. E pep lec'h e kroc'hen du pe e kroc'hen gwenn an dud yaouank a zo bepred henvel, mez o deus o komz ar yez o deus desket war barlenn o mamm.

\*

\*\*

Goude ar vag, setu ar c'har bras goloet gant deliou-gwez ha starniet outan daou ejen. Gourvez a ris e fonz ar c'har war eun tammig kolo riz, met p'en em lakaas an ejened da zaoulammat e kave-d'in e vije bet torret eur gostenn bennak ennon; met nann, « boujant » edon pa chomas a-sav an ejened e kichen ar presbital. Torret e oa an heol ha gras oa beza beo.

Ar pardon a dliz komanz dre ar prolesion, da serr-noz, war-dro seiz eur.

Ar barrezianiz a oa o tont war an hentchou, a-dreuz ar c'hoajou, a-hed ar menezioù a zo endro d'al lenn. N'oa nemet 5 eur c'hoaz hag e oa dija eur c'halz o c'hedal; rak aman n'eus ket a brez-labour. An darn-vuia eus an dud n'o deus tamm peadra ebet, hag ar re all n'o deus nemet eun tammig lochenn graet gant pri ha deliou ha disheoliet gant eun nebeudig gwez. Peogwir e c'hellont beva gant eun dournadig riz perak en em chala da gaout muioc'h ? Eun tammig dilhad a zo ret evit dont d'an oferen, met war ar pemdez n'eus ket ezomm dre ma vez tomm an heol. N'eus ket a labour er gear,

setu perak e teuont abred d'an iliz, ar gwazed dreist-holl, hag evel ma n'ez eus na mouniz nag ostaleri, ec'h azezont war ar blasenn da varvailhat.

Hag ar gaoz a ia endro, rak teudet mat eo an Indianed hag eur spered lemm o deus ivez. Diwar-benn petra e kaozeont ? E Breiz ar gwazed a vez o c'hortoz ar pevare e porz ar wered (aon o deus moarvat da vont re abred d'an iliz) a c'hell marvailhat diwar-benn ar peuri hag ar chatal, met an dud-man n'o deus na peuri na chatal. N'eus forz, kaozeal a reont...

— « Setu m'eo poent, emeve, komanz ar prosesion. » — *Gedit, tad; an holl n'int ket en em gavet c'hoaz... o gwelet a rit o tont duhont dre an hentchou bihan... Ni ne gomansomp an offisou nemet pa vez en em gavet an dud...*

Noz tenval eo... Kanaouenn, musig, fuzennou, (fusées), lenv ar vugale, setu ar prosesion o kuitaat an iliz. Dre ma kerzemp e save war an hent poultrou teo evel moged. An holl diezigou, zoken ar re baoura a oa kinklet ha sklerijennet kaer. Ar baganed o unan o doa kempennet o ziez ha laket goulou dirazo, rak er vro-man eun niver bras anezo a zo war-vez en em gonvertisa, met n'eus den ebet da brezeg d'ezo an aviel, hag ouspenn-se eur gwennegeg bennak ivez a vefe ret evit al labour-se. Ar paourkez tud-se n'o deus ket zoken daou wenneg da brena eun tamm dilhad evit dont d'an iliz, an dra-se da vihana e rank ar misioner prena d'ezo.

Koulskoude, arabat klemm : en despet d'an dienez-se al labour a ia war-araok. Dre vilierou e vez bep bloaz konversionou en eskopti-man. Ret eo pedi evit ma teuint bemdez war gresk...

Ha setu ma kerzomp atao hep ehana gant ar musig hag ar c'han. Aman hag a-hont war ribl an hent e weler kirri gant an ejened gourvezet en o c'hichen hag ar charretour o roc'hat er c'har. Pa zeuio an deiz ec'h en em lakint adarre en hent, hag e reont evelse. beajou hir spontus. Hag e kendalc'hemp da vale; eul leo bennak hor boa graet dija. Ne oa bet lavaret netra d'in hag en em c'houlell a raen hag epad an noz e padfe ar prosesion. Ne greden lavaret grig, ar voused vihan a oa endro d'in, eur fouge enno gant o roched wenn o ficha war o lostenn verr, n'o doa doare ebet da veza skuiz.

Erfin evelato e chomjomp a-sav. Ar musig hag ar fusenno en em lakaas neuze da ober gwasoc'h-gwaz a cholori, epad ma kendalc'h ar merc'hed etre va c'hein da lavaret o chapeled a-bouez o fenn.

Edomp o tont endro...

An iliz ne oa enni nemet goulaouennou ha garlanteziou a bep seurt liou a istribilh ouz ar mogerioù. Gwasaat a reas c'hoaz an « toumpi » pa zigouesjomp enni. Unnek eur oa pa stagjomp gant ar gousperou.

Tad MARIE-URBAIN, eus Lanarvily.

Ar re ac'hanoc'h, lennerien vat, o defe c'hoant kas d'an TAD MARIE-URBAIN arc'hant of. rennou, pe ober d'ezan eun aluzennig bennak, n'o deus nemet o digas d'an TAD MEDARD, 28, Avenue de la Marne - Lorient (Morbihan.)

## Taolit evez!!

*Tud vat Plouguin o deus graet eun digemer eus ar re c'houeka d'ar Vuhez Kristen, a gavo er miz a zeu er gelaouenn eur poltred bennak eus o mision. An hini a oa o tenna poltrejou ne oa ket siouaz, gwall ampart war e vicher ha n'en deus ket graet labour re gempenn. Eur wech all e raio gwelloc'h.*

## Pemp gwennegeg

*Pemp gwennegeg a zo ne-seud a dra.  
Petra c'heller ober gant pemp gwennegeg ?  
Ober c'heller kalz vad.  
Ober c'heller kalz droug.  
Lakit e ve bep mintin, er 36.000 parrez euz hor bro eun den hebken o rei 5 gwennegeg da eur journal.  
An dra-se a ra dioustu 9.000 lur bemdez.  
Hogen pa z' eus 365 dervez er bloaz, gant pemp gwennegeg hebken roet bep mintin e pep parrez, ar journal a resevo 3 milion 285.000 lur.  
Klervet a rit ? tost da 3 milion hanter.  
Ha c'houi lavaro n'eo kement-se netri ?  
Ha koulskoude, daoust ha n'eus ket ouspenn 5 gwennegeg dre barrez o kuitat yalc'h tud, hag a zo katoliked war o meno, evit mont da goueza e kefiou ar c'harzetennou fall ?  
E-keit-se ar journalion katolik a c'hed awechou gand anken ar sikour o dije ezomm anezan. Nag a vad ha na vez ket graet !  
Nag a zroug a vez graet, er c'hontrol !  
Abalamour da 5 gwennegeg a re o deus ar gatoliked.*

JOBIG.

## GOULENNIT DIGANT

Louis LE DU, 13, place du Centre, Guingamp, pe digant  
Ao. SUBERBIE, 34, place du Centre.

AR VOTEREZ LE VOTE

gant an TAD ROZEC, S. M. M.

PEVAR REAL ar pez.

C'HOUEC'H REAL dre ar post.

ECHU EO AR JUBILE BRAS... EMAN DEUET MIZ  
MARI.



RA BLIJO GANT AR WERC'HEZ LAKAAT BRE-  
MAN DA GOUEZA WAR AR BED AR GRASOU A ZO  
BET GOULENNET DIGANTI E LOURD HAG ER  
BED A-BEZ GANT AN HOLL GRISTENIEN ! !...

Imp. LE BAYON-ROGER & C<sup>ie</sup> - Lorient.

Le Gérant : G. Le Bayon.